

40

LA

644

GWERZ ANN OTROU ZANT LUBIN

Patron Illiz Moëlou

War douar gristen Bro-Franz, 'barz ar ger a Boitier,
Zant Lubin a oe ganet, ganet a dud dister ;
Netra na dal ann arc'hant, netra na dal ann aour,
Euruz neb a gar Doue, neuz forz nag e ve paour.

Iaouank e oa Zant Lubin, da gentan pa oa ved
Pa oa vet d'al lanneier, da vèz gand ann denved ;
El lann, da benn he zevez, pedi re peb beure,
Ha keit-se war ar e'hlizen he zenved a beure.

E kreiz al lann o pedi, hag hen war he zaoulin,
Kaer e oa dirak Doue, kaer e oa Zant Lubin,
Skouer e re war ann douar da gement hen gwele,
Ha plijadur enn envou d'ar Zent ha d'ann ele.

Bemde, bemde, ar bugel a renke mont da vèz,
Pa dremenaz n'he gichen, n'he gichen, eunn devez,
Pa dremenaz eur manac'h, gant-han eul lever braz ;
Ha 'neur redek war he lerc'h, Zant Lubin a laraz :

« Ma zad, me garfe ive, me garfe deski lenn,
» Ha kavet evel-d'hoc'hu eul lever evel-henn,
» Eul lever braz evel-henn, da laret da Zoue
» Pedennou ha meuleudi enn-tro pad ma bue. »

'Dal ma klevaz ar manac'h, gand kals a blijadur
A reaz d'ar potr bihan pennad kelennadur ;
Deski mad e reaz d'han ha deski penn-da-benn
Hano al lizerennou ann eil war-lerc'h e-ben.

Ha tad ar Zant a laraz, pa zeuaz da gleved :
« Arabad e koll amzer ha chomm gand ann derved ;
» D'ar skol, d'ar skol, ma mabik, d'ar skol, hag et timad ;
» Pedet ar Spered-Zantel, ha c'houi a zesko mad. »

Hag enn peb mare zentuz, ar potr a iêz d'ar skol,
Na lakaz ket he zanve nag he amzer da goll ;
Abenn eur pennad goude, e oa grêt he studi
Ha raktal e c'houlennaz monet d'ann abbati.

Zant Lubin enn abbati, adal ma oa digouet
Na zebre, koulz e laret, nemed eur fulen voued ;
Neubed amzer e kouske, e kouske war ar c'hoat,
Morzet oll he ezili, ken a skorne he c'hoad.

Ar Zent gand peb izelan a n'em lak enn eur rez ;
Zant Lubin 'tousez ar venec'h, daoust d'he zeskadurez,
A re ar stertan labour, hag er porz hag enn ti,
Evel pa vije mevel d'ann oll enn abbati.

Avit a oa er vro-ze, Avit, eunn den zantel
Hag a re da bep hini ha skouer vad ha kentel ;
O klask ann tu da blenât hent he zil vidigez,
Zant Lubin ouz Zant Avit a rez anoudegez.

Noz ha de, war ann douar, noz ha de daoulinet,
Pedennou kaer a lare ann daou Zant unanet,
Ha gand ton ho c'hantikou a lakent da ziston
Ar c'hoat braz, enn ho c'hichen, hag ar zaonennou don.

Braz oa zantelez Lubin, kreski re kouskoude,
Skler oa da vroiz gouzout, neubed amzer goude,
Ouz hen gwelet oc'h ober meur ha meur a vurzud,
Hag e kever ho madou hag e kever ho zud.

Da goulz ann east, eur blavez, ann ed a ie da goll,
Dispennet 'barz ar parkou, gand glao hag avel foll ;
Ha Zant Lubin da bedi, hag ar glao tavet krenn,
Ha torret krenn ann avel, mui bod na del na gren.

Eskob ar gêr a Charter a zeuaz da vervel ;
Ha Kildebert, roue Franz, e iêz n'he benn gervel,
Gervel neuze Zant Lubin da zont da gas ar bob,
Da zont d'ar gêr a Charter, da vout laket d'eskob.

Ar bob a lare, 'neur vouez : « Mad 'neuz grêt ar roue,
Ann neb zo galvet gant-han, zo galvet gand Doue. »
Ha brud war-dro Zant Lubin, hag ann oll d'hen meuli ;
Ar Zant adal ma klevaz, goust e oa d'han zempli.

« Karg ann eskob, e lare, na gemerinn biken,
» Eur garg huel e hon-nez ha ponner da zougen ;
» Ar zamm braz da bep krenvan a zo bet a viskoaz,
» Ha me ziuoaz ! e dinerz ha dister ma diou skoaz. »

Netra na dale n'em glemm ; ar roue 'noa lared,
Ar bob a lare ive, ha zenti e oa red.
Ha pa oa laket d'eskob, Zant Lubin gwasoc'h-gwaz
A stagaz he garante ouz Jezuz hag he groaz.

Ann drouk-spered a iude, ha kaer en oa iudal,
Ann oll 'barz ann eskopti, beleien ha tud all,
Dalc'het gand skouer Zant Lubin ha gant he gomz ive,
Ann oll a ie kalonek a-du gand ar gwir fe.

Ar Zant a gare daou dra ; ar paour, ar fe gristen :
Pa vije red ho difenn, na sponte arok den ;
Karet e oa ha doujet gand tud ar maneriou,
Doujet ive ha karet e oa 'barz ar c'hèriou.

Dont e reaz ann tan gwal da gregi enn Paris,
Goloet kêr a voged, ha stravillet kêris ;
Dihunet gand ar gri-forz, dihunet ar roue,
Ha dioustu klasket gant-han Zant Lubin, den Doue.

Ha Zant Lubin o tonet, o tonet a red kaer,
Ha da c'houlenn gand Doue c'harz ann tan diwar gêr,
Ha na oa ket he beden, he beden peurlaret,
E oa mouget ann tan-gwal hag ar gwaleur paret.

Penn-da-benn d'he eskopti e plije d'han bale,
Hag e kavaz eur belek klanv-fall war he vele ;
Ma Doue, 'me Zant Lubin : « Ho pet true ouz-han ! »
Setu raktal ar belek ken iac'h hag ar iac'han.

C'hoaz e reaz burzudou, na oar den ped ha ped,
Tud mac'hagnet ha dinerz zigant-han en euz bet,
En euz bet hag ar iec'hed, hag ann nerz war eunn dro,
Ha bue roaz ive d'eur plac'h a oa maro.

D'ann ine koulz ha d'ar c'horf ar Zant a re bue,
Meur a gristen dianket neuz kaset da Zoue ;
Evid ann oll damantuz, nemed evit-han, nann,
Piniñen gri ha kaled e re d'han-he-unan.

Tremenn seiz vloa gand klenved e chommaz kent mervel,
Neuze oa deut ar mare da Zoue d'hen gervel,
Ha da roi d'han kurunen, kurunen hag eurvad,
Eurvad koulz ha kurunen en oa gonet ervad.

War douar Kergrist-Moëlou, e bet zavet he di,
Hon zud koz enn-han liez a zeue da bedi :
Hon zud koz, tud a galon, ha kerkoulz tud a fe,
A gare ann Otrou Krist ha Zent ar vro ive.

Evel-t-he, pelerined, a-dreuz d'ar prajeier,
A-dreuz d'ann hentchou meinek, a-dreuz d'al lanneier,
Hag a-dreuz d'ar meneou, diredet, gand fe vad,
Diredet da Zant Lubin, da c'houlen ho mennad.

Diredet, c'houi da gentan, c'houi, neb en euz klenved,
Ha gand ann drouk ezili, c'houi, neb a zo brevet ;
Ar re bed mad Zant Lubin, a ia da gêr pare,
Hag a lar a-greiz kalon : « Zant Lubin, trugare ! »

Zant Lubin, mignon Doue, ni gân d'hac'h meuleudi ;
War ho kador enn envou, c'houi zo kreiz ann dudi ;
Plijet ganac'hu selaou, selaou hon fedennou ;
D'hon c'horvou-ni roit iec'hed, ha fe d'hon c'halonou.

Imprimatur

† EUGÈNE,

Eskop Zant-Briek ha Landreguer.

22 a viz even, 1885.